

*YF\_0083\_Bolom kozh*

Pa oen merc'h yaouank da zimezin  
Me a gave galanted muioc'h evid na faote din

Ya me a gave galanted en ker hag en maezou  
Doned a raent d'am gweled d'an enderv a goubladou:

Doned a raent d'am gwelet ar zul a goubladou  
A zigasent din blankedou avalou fis

Ya blankedou avalou blankedou per melen  
Gaojent kavoud an tu ya d'ober al laez din-me

Breman me a zo dimezet, dimezet hag eurujet  
D'eur c'hozh bolomig kozh ha me n'en garan ket

Eur c'hozh bolomig kozh paset tri ugent vloaz  
Ha me, fumelenn yaouank am-boa ket c'hoazh ugent vloaz

Eur c'hozh bolomig kozh torret dre an daou benn  
Ha me, fumelenn yaouank, ken plom evel eur gwac'henn

Eur c'hozh bolomig kozh gand e vleo hag e varv,  
Ma na plije da Zoue, pell 'zo' vije bet marv

-Tavit, tavit 'ta plac'h yaouank, ar c'hozh bolom a varvo,  
Ha c'hwi 'ta, plac'h yaouank a yelo eun devezh en dro.

-Bolom ne c'houl ket eh an me da zansal.  
En a breno din-me eur vombard, me a zono d'an dud all !

- Bolom ne c'houl ket a gaojan ouzh an dud  
Ya, me a gaojeo ouzh an dud rag laret e vo ez on mud

- Bolom ne c'houl ket a fragan-me d'ar zul  
En a breno din-me eun habit du ha ne fragin ket mui !

Setu marv ar bolom ha en laket en douar  
Gouelit dezhan breman, an hini en-eus glac'har.

Tapit din eur penn onion, e vo sonjet e ouelin,  
Posubl na vin ket gwelloc'h med propikoc'h e vin.

Ni a lako sonerien da senin war e vez  
Ha ma gan ar re arall, me a gano ivez !

Ni a lako sonerien digant pifou argant  
D'enorin ar bolom abalamour d'e argant.

Quand j'étais jeune fille à marier  
Je trouvais des amants plus qu'il ne m'en fallait

Oui je trouvais des amants en ville et dans les campagnes  
Ils venaient me voir le soir en couples

Ils venaient me voir le dimanche en couples  
Et m'apportaient des 'soux de pommes'

Oui des 'soux de pommes' des 'soux de poires jaunes' Ils  
parlaient de trouver la manière de me faire la cour.

Maintenant je suis mariée, mariée et épouse  
D'un vieux bonhomme que je n'aime pas.

Un vieux bonhomme de soixante ans passés,  
Et moi, jeune femme, je n'avais pas encore vingt ans

Un vieux bonhomme cassé par les deux bouts  
Et moi, jeune femme, droite comme une tige de chanvre

Un vieux bonhomme aux cheveux et à la barbe grise  
S'il n'avait plu à Dieu, il y a longtemps qu'il serait mort

Taisez vous, taisez-vous jeune fille, le vieux bonhomme  
mourra,  
Et vous un jour, vous redeviendrez jeune fille.  
Bonhomme ne veut pas que j'aïlle danser.  
Il m'achètera une bombarde et je sonnerai pour les autres !

Bonhomme ne veut pas que je parle aux gens  
Oui, je leur parlerai sinon on dira que je suis muette

Bonhomme ne veut pas que je me pavanne le dimanche  
Il m'achètera un habit noir et je ne me pavannerai plus!

Voilà que le bonhomme est mort et mis en terre  
Pleurez-le maintenant, celui qui a de la tristesse.

Donnez-moi une tête d'oignon, on pensera que je pleure  
Peut-être que je ne serai pas meilleure, mais je paraîtrai  
plus propre.  
Nous mettrons des sonneurs pour sonner sur sa tombe, Et si  
les autres chantent, je chanterai aussi.

Nous mettrons des sonneurs avec des pipeaux d'argent  
Pour honorer le bonhomme à cause de son argent.